

HISTOR ADMIRABL DEMEUS ar BOUDEDEO

Pehini, abaoue maro hor Zalver, ne ra nemet bale nos ha deiz ac'hann da fin ar bed, abalamour d'an effronteri an devoa bet en andret hor Zalver Jesus-Christ, pehini, pa voa o vont d'ar maro, a falvezas dezàn disquiza var e stal, hac e teuas d'en rebuti evel eur scelerat.



Var ton : GUERZ SANTEZ ANNA.

Asistantet enorabl, tostait da glêvet
Ar vuez pitoyapla a voe biscoas ar bed ;
An histor zo truezus demeus ar Boudedeo.
A zo nôs-deiz o vale aboe hor Zalver maro.

Eus a tribu Nephtali, a guer Jerusalem,
Voa ganet Absarius, carguet a anathem ;
Dont a ras ar bed-mâ en amzer Herodes.
A felveas massacri Jesus, Mab ar Verc'hez.

Va zad a voa ur c'halve, va mam kemennerez,
Hac a laboure en Templ da ober broderes ;
Ha va c'herent am desgas da lenn leor al lezen,
Hac hini ar Brofetet iveau a dra certen.

Goude e voen demeet gant va c'herent afin,
Da eur vreg fur a prudent a tribu Benjamin,
A bini'm boe tri buguel en amzer ma teuas
Autrou Sant Yan Badezour d'annonç ar Messias.

Sant Yan a convertissas calz eus ar bayanet
Pere voa idolatret, caledet er pec'het :
Dec mil den en eun devez en deveus badeet,
Me, ma greg, va bugale e voamp bet o velet.

Va greg a lavaras din : va fried, emezi,
Lekomb en em vadezi, enont ê ar Messi ;
Ha me o respont dezi gant un ear direspet :
Na ni nac hor bugale ne vimp qet badeet.

Aben eun nebeut goude Sant Yan voe dibennet
Dre urz roue Herodes, eun den cruel meurbel,
Ha ma teuas hor Zalver evit rên en e blaç ;
Hac a ras dre ar c'hanton calz a viraclou bras.

Clêvet e meus bet Jesus alies o sermon,
Hep ne meus bet profitet eus e bredisation ;
Va-unan e voa presant p'en doa rassaziet
Dec mil den gant bemb bara ha goudeze pesquet.

Me Boudedeo maleürus a velas c'hoas soudan
Jesus o ressucita Lazar, breur Madalen,
Ha güelet dibossedi calz a dud possedet,
Ha sivoas din, pec'her bras, ne meus tam profitet.

Aben eun nebeut goude voe Jesus kemeret
Gant calz eus a judevien er jardin Olivet,
Ha condaonet gant Pilat da rancout da zouguen
Ar groas ponner ha mezus evit ar bec'herien.

Pa voe ar groas achuet, hor Zalver voe samet,
Da vont da venez Calvar da vea crucifet :
O velet an dud o redec, me guemer va buguel,
Ha me mont da dal an nôr pa yê en da vervel.

Cetu Jesus o tremen neuze abiou va zi,
Pehini en tal va stal a deu da reposi,
Ha me lavarat deân gant eur gomz arrogant :
Qé alesse euz va stal, te zo eun den mechant.

Ganes on dizenoret gant da effronteri,
Pa qüelân o reposi amàn e tal va zi ;
Querz alesse, den ingrat, cos sorcer milliguet,
Querz alesse d'ar maro, pe c'heus he meritet.

Jesus a resbontas din gant eur voez truezus :
Mont a ran da-bartia, den fall, den maleürus,
Me reposo gant va Zad, te valeo bepret
Dre bêvar c'horn ar bed-mâ ac'hant da fin ar bed.

Ia, te valeo ac'hant d'ar jugamant.
Hac er c'hosie deo d'am Zad am velo suramaant
O varni ar bec'herien pere voa condaonet
Da vont d'ar flamou gries, ar re just d'ar joaüstet.

Pa glêvis comzou Jesus, va c'halon voa touchet.
Ha me rî va bugale eun instant d'am pied,
Ma velis ar Veronic o sec'hi bisach Jesus.
Ha chom en he mouchouer e boltret truezus.

He ellout n'em arrêti et heuillis hor Zalver.
Hac e velis va Jesus ha calz graguez santel :
Ar bourrevien d'ar Verc'hez o deveus lavaret :
Cetu amâ an tachou ma vo ho Mab staguet.

P'am boe güelet hor Zalver o vervel var ar groas
E creiz etre an daou laer carguet a boannioù bras,
Ha me commanç va beach gant calz eus a anquen,
O tont da laret adieu d'ar guer Jerusalem.

Sonjît eta, Bretonet, peguement a c'halch'har
En deus ar Boudedeo bremâ var an douar !
Rancout qüillat e gartier, e vreg, e vugale,
Hep qimiadi diouto, evit atao bale.

Pa en devoe baleet eun nombr a vlaveziou,
Ec' éruas en Egypt. pel bras demeus e vrô,
Eno e mâ ar Mor-Rus, elec'h m'oee tremenet
Moyses gant bobl Doue, hep cavout drouc ebet.

Mont a ris eus ac'hane da enezen Candi,
Elec'h emedi en noas an dud a zo enni :
Eno e velis eun tad o trec'hi a damou
E verc'h evit sacrific da rēi d'o doueou.

Mont a ris da Malhodo, e pelec'h eus tud drol,
Pere a ador Doue hac an diaoulou oll ;
Pedi reont Doue da gaout prosperite,
Hac an diaoul a bedont ne rai qet droue déze.

Güelet e meus er Japon ur vam meurbet cruel,
Aini deunas da laza, sivoas, e daou buguel.
Er vrô-ze é permettet laza ar bugale
Pa n'o deus quet a vara da rēi déze.

Goude quemeris an hent da vont d'an Enezi,
D'an Americ, d'an Asi, ha neuze d'an Turqi.
Ar graguez eus var vrô-se a vale d'an arme,
Hac an ezac'h o deus soign demeus ar vugale.

Eno emedi ar c'his da lazâ ar brotret,
Nemet unan dre famill na ve james miret.
Be' o deus eur rouanez a ro commandamant
Da laza an oll botret, hep caout dê nep damant.

Er guer eus a Garniol eus eur c'his drol meturbet,
Rac eno an dud yaouanc, pa vezont eureujet.
E râncô ar vreg yaouanc, nôs qenta e heured
Mont da gousqet gant ar princ, vit beza enoret.

Bet on ebars eur c'hood hanvet Cisaria,
Elec'h ma eller bale cant leo d'an neubeuta
Hep cavet dour da eva, na feunteun, na rivier,
Ar pez zo goal incomod da oll dud ar c'hartier.

Monet a pis c'hoas pelloc'h, d'ar guer a Vosopa
Pini zo eus he divoal eur princ eus an drola :
Ur vanden chaç a merc'het en deus evit gardou,
Ha n'en deus qen soudardet evit difen e vrô.

Ac'hane'yis da eur guer zo hanvet Estopet.
Elec'h ma zeus serpentet ha loened vil meurbet
Zo quer teo ha corf un den sur ma vent muzuret
O doveus d'an neubeuta daou-uguent tronted het.

Er spaç demeus a gant vloas ez on bet o vale,
Ha me éruont adare em brô hac em c'ontre :
Allas ! maro voa va greg coulz ha va vugale,
Ha den ebet eus va brô certen n'am anavee.

Neuze e teuis da Rom, ebars en Itali,
En amzer-ze e voa calz eus a c'hlac'har enni ;
Güelet' ris marzeria nombr bras a gristenien,
En defot ne renoncent d'o feiz ha do lezen.

Me a vale var ar mór coulz ha var an douar,
Ha me partiel neuze evit ar Franc, bro car ?
E Marseil, Bourdel, Paris, Niort, Naonet, Lyon,
Ac'hane da Vreiz-Izel, d'ar guer vrao à Roazon.

Guelet e meus Montroulez ne voa nemet eur c'hood
Ha güelet Brest ha Quimper ebars en douar prat,
Ha güelet ar guer a ls en e frosperite,
Hac ar gær à Lexovi a mens güelet ive.

Güelet e meus Breiz-Izel en coad ha menezhou,
Ma zoat evel sovaget neuze ebars er vrô :
Me a vel calz a guerioù er vro-se batisset,
A ra calz a chenchamant abaoe ma zon bet.

Me vel ar guer a Roazon eur guer gær batisset,
Dol, Guenet ha Sant-Malo, Dinan hac an Naonet,
Sant-Brieuc ha Landreguer, Lannion, Montroulez,
Castel-Pol ha Lesneven ha Landerne ive.

Ar c'hsenior ze meus güelet e coad hac e prajou
Pa deuis d'ober va veach qenta ebars ar vrô ;
Cetû batisset Quemper, ha Brest ha Recouvranc,
Quemperle, Moelan, Kerahes ebars en assuranç.

Anfin, pa on condaonet gant Doue da vale,
Me zo bet en em gavet e creiz meur a arme ;
Canoliou à fusiliou, clezeyou, sabrennou,
Netraa ne dê bet capabl de rēi din ar maro.

Bet on ebars en listri a zo bet perisset,
Hac an dud a voa enne a meus güelet beuzet,
Ha me hanvet Boudedeo n'em bije drouc ebet
Comzou Doue a râncô bea accomplisset.

Condaonet e zon gantâ da chom var ar douar ;
Comprenit oll christenien, emâ zo din glac'har !
Va tourmanchou er bed-mâ biqen na échuo
Qen a deui Doue da varn ar beo hac ar maro.

Ar som eus a bemp goennec so em godeb bepret
James ganet nep seurt clenvet me ne don attaqet.
Bet on ebars en broyou elec'h m'oa ar vocen,
Hep na zeus staguet ouzin na clenvet nac anquen.

Va boutou na va dillat james na uzont qet,
Dre bermission Doue a meus bet offancet ;
Peder guec'h a meus redet pêvar horn ar bed-mâ,
Ha güelet e meus ive calz chenchamant ennâ.

Bremâ e zon comancet da redec a bempet.
Hep ne don ambarasset gant dibri na cousgat ;
Güelet a meus bet broyou a zobett oll revinet
Ha calz demeus a guerou gant ar gurun dêvet.

Ne mens qet calz amzer evit chom da barlant
Me a gred e ma va zreid vargore glaou ardant,
Nan, ne zeus nemet Doue a elfe disclêria
Ar boanniou bras a souffrân qerqent ma reposan.

Pebes maleur è din-me bea bet rebutet
Demeus a guichen va stal Jesus Salver ar bed
Pa voa o vont d'ar maro, da zont da zisquiza
Ha me neuze dre valeur a zeus d'e zispriza.

Emâ è ar maleur bras a meus var ar bed-mâ !
Emon alao o vale ouspen trivac'h cant vla,
Ha c'hoas e ranqân bale ac'han da fin ar bed :
Pedit Doue evidon, ma zin d'ar joaüstet.